

AR GEVREDIGEZH

UR C'HRAOU-DEÑVED KEVREDIGEZH, E KÊR HA SOKIAL 100 %



À lire en breton
et en gallo
surcotesdarmor.fr/mag202

120 dañvad, daou azen hag un nebeud yer zo o chom ennañ. Pevar bloaz zo e vez degemeret tud a-youl vat er c'hraou-deñved kevredigezhel Sors tes moutons er C'hêriadoù e Sant-Brieg : paotred ha merc'hed ar c'harter, tud yaouank hag a zo o cheñch micher, tud e bec'h... Pal ar gevredigezh : adkavout al liamm gant an natur evit skoulmañ darempredoù sokial adarre.

Ur bradenn vras, 12 hektar enni, ma vez dañvadezed hag oanet o peuriñ. Er c'hrañj, goudoret diouzh ar glizh, zo ur c'hazh o'n em silañ etre hon divhar hag un nebeud yer o pikotañ, tud o c'hoarzhin ha trouz ar c'haf e tremen goustad dre ar sil. Ar gêr vras a seblant bezañ pell-pell... E Sant-Brieg emaoomp koulskoude, e kraou-deñved ar gevredigezh Sors tes moutons, deuet di d'en em staliañ e 2021 etre an herberc'h yaouankiz hag ar greizenn Jakez Karter. « Hon c'hraou-deñved zo ur gwir lec'h buhez digor d'an holl dud a faot dezhe kemer perzh, ober anaoudegezh gant al labour-douar, bitellat, komz gant ar re all... An dud a c'hall dont amañ pa faot dezhe gant ma vint ezel eus ar gevredigezh, eme Aline Colleu, prezidantez ar gevredigezh. *An degemer sokial eo ac'h a d'ober kalonenn hon labour-douar evit reiñ o flas da dout an dud, pe e vefent enbroidi pe tud hag o deus diaezamantoù sokial, en o c'horf pe en o spered.* »

OBER WAR-DRO AL LOENED, TREUZPEURIÑ, TOUZAÑ AN DEÑVED...

An dud a-youl vat, un tregont bennak en holl, a vez gwelet bemdez o reiñ sikour evit al labourioù pemdez er feurm. « An dud o dez ezhomm eus an natur, eme Martin Nagel, deuet da vezañ ar goprad kentañ er gevredigezh en neve-

Aline Colleu, prezidantez, hag Aline Gaudin, sekretourez ar gevredigezh "Sors tes moutons" eus Sant-Brieg.



STÉPHANIE PRÉMEL

zamzer. *Gwelet e vez alies-tre : en em gavout gant an natur hag al loened zo mat evit chom sioul ha gwellaat yec'hed ar c'horf hag ar spered.* »

« SOKIAL OMP DRE NATUR »

Amañ e kemer an dud an amzer a zo ezhomm evit deskiñ, solutaat o barrezhioù ha degas anezhe an eil re d'ar re all. Aline Gaudin, sekretourez ar gevredigezh, a lavar : « Desket em eus ur bern traoù : kas ur tropellad, touzañ deñved, kas anezhe da cheñch peuriñ, pareañ al loened, reiñ laezh gant ar vured, sevel speurennoù... Pa veger amañ e vever traoù dreistordinal gant an dud hag al loened ! » Luc, un den a-youl vat aketus, zo o tremen. Yann Viteller eo er c'hraou-deñved tamm pe damm : « Adimplijet em eus danvezioù evit sevel privezioù sec'h, rastelloù, gwaskedoù er pradeier... »

Lañset e oa bet an traoù gant Aline Colleu ha Martin Nagel. Labourat a rae-hi er bed sokial, hag eñ a oa koadour.

« Krog e oamp d'en em soñjal war an afer-mañ e 2019, pa faote dimp mont pelloc'h gant ar genskoazell sokial dre al labour-douar. Sokial omp dre natur ! »,

eme ar c'houblad. En em gavet int dre zegouezh war an douaroù fraost-mañ, nepell diouzh Koad Boesel. Tamm-ha-tamm e voe muioc'h-mui a dud er gevredigezh hag an oberoù ac'h eas war-raok : legumajerezh, pourchasoù eko-peuriñ, gwerzhañ produioù al labour-douar evel pakadoù kig ha kirinadoù... Traoù e-leizh emaint e-sell d'ober, da skouer prientiñ ur gludeg evit ur c'hant yar bennaket, labourat gant loened stlej ha kempenn un hent tro-dro d'an herberc'h yaouankiz, pe eko-peuriñ gant ar yer. Ar gevredigezh he deus lañset ur c'houlzad arc'hantaouiñ a-stroll evit kas tout an traoù-se da benn. Ur c'hemenn eo d'an dud a faot dezhe solutaat al liamm-se etre kêr hag an natur, etre al labour-douar hag an dachenn sokial. ●

Stéphanie Prémel